

7. 649 A.
Tirage non mentionné au 649
 OLLIVIER

KER IS, AR ROUE GRALON

HAG ILIZ MIRAKULUZ ANN ITRON VARIA REMENGOL

—
 « Neb a bed Gwerc'hez Remengol
 « Birviken ne daia da gol... »

ENN ESCOPTI KERNE, EL LEC'H E MA BREMAN MÔR DOUARNENEZ, E OA
 GUECHALL EUR GEAR VRAZ MEURBET HANVET IS.

Eur voger ledan hag huel, gant sclujou houarn, he diffenne
 deuz ar môr. Er gear-ze ne velet, e touez an dud pinvidik, nemet
 dizurz, goall exempl ha fallagriez. Gralon, pehini a chome
 neuze er guear a Is, a oa Roue Breiz-Izel. Bet e oa brezeller en
 he iaouankis, ha rust enn andred he zujidi; mes enn he gozni,
 sklerigennet dre ar feiz kristen, e teuaz da veza dous evel eun
 oan. Hirvoudi ar re aliez war dizurzou Is, ha war ar vue dirollet
 a rène he verc'h, ar brincez Ahès, gant an noblaz yaouank a
 gear ha deuz a vro hanvet hirio Kear-Ahes, pehini a oa dez-hi
 a leve.

ENN AMZER-ZE, IVE, E OA HE BREIZ-IZEL DAOU ABOSTOL SANTEL,
 DAOU VIGNON DA ZOUE, SANT KAOURINTIN, KENTA ESCOP À GUEMPER,
 HA SANT GWENOLE (1), KENTA ABAD A LANDDEVENNEC; ALIEZ O DEVOA
 PREZEGET AR FREIZ ER GEAR A IS, HA GOURDROUZET AR ROUE GRALON,
 ABALAMOUR D'ANN DROUG-OBEROU, D'AN TORSEJOU HA D'ANN INJUSTISOU
 A REE BEMDEZ, E PALÈS HE VERC'H YAOUANK; MES GOAB A REE ANEZHO,
 HAG AR ROUE, SIMPLEET DRE ANN OAD, N'EN DEVOA MUI A CHALLLOUD
 AVOALC'H EVIT ARRETI DIZURZOU KER BRAS.

Doue a skuizaz, er fin o welet Is kaledet enn he fec'hejou, hag
 a roaz da anaout da ÆL BREIZ-IZEL, he vignon, Gwenole, penoz,
 eb dale pell, ar gear gaér-ze a vije beuzet gant ar môr. Kerkent,
 Gwenole a pignaz var he varc'h, hag a redaz da gear Is, o sonjal
 c'hoaz mouga koler Doue. Mes tremenet e oa an amzer a druez.
 P'a enn em gavaz ann Abad santel, war dro anter-noz, sclujou
 Is a oa digor, hag ar môr a groze spontuz, o tiruial war an
 dud, ann tier hag ar paleziou. Gwenole ne allaz savetei nemet
 Gralon epken; gwelet a rer c'hoaz roudou treid ar marc'h er
 garek, war pehini, abaoe, abaded Landevenec, araog komer
 ho c'harg, a deu da ober ho feden ha da anaout ar Roue Gralon
 evit fondatour ho chouent.

(1) *Gwen-oll-e Oll-e-Gwen* (il est tout blanc), hanvet evel-ze gant he vamm
 ar santez Ven, abalamour ma oa eur bugel koant a fur. Sant Gwenole, dre he
 vertuziou, en deuz meritet an hano kaér ÆL BREIZ-IZEL (l'ange de la Bretagne.)

— 2 —

Ahès, merch'h fall ar Roue, kiriek a revin Is, a oë troët e *Marie*, *Morgan*, anter maouz hag anter pesk. Pa bar ar loar, he c'lever c'hoaz aliez o kana, war môr Douarnenez, a uz revinou ar gear veuzet. He daoulagat a zo evel diou stereden, he bleo evel ann aour, he gouzoug hag he diou vronn k'en gwenn hag ann erc'h-hag he mouez mélodiuz a laka da gouskat dre he chalmou ; evel-ze, maatoloded ar vro, raktal ma he c'hlevont, a lavar etrez-ho, gant spouron : « Tec'homp, Ahès a zo savet deuz he « falèz, ar gwall amzer ne ma ket pell, a ma taleomp e vezimp « tolet, kousket, war ar rec'hier. »

Evel Sodôm, Gômor ha Babylon, kear Is ne m'a mui ; hag hirio ar môr a ruill dreist he fenn.

Da zao heol, Gralon, o veza pignet gant Gwenole var leïn Menez-Hôm, a dolas ac'hano eur zell truezus war he lerc'h ; mez el lec'h ma edo ar gear a Is, ne velaz mui nemet môr Douarnenez, hag e kouezaz d'ann daoulin evit trugarekat Doue hag ar Werc'hez da veza saveteet he vuez.

Pa zavaz diwar he zaoulin, e velaz dindan ann heol, o luguernei, *Ru-men-Goulou*, pe *Men-Ru-ar-Goulou*, war pehini vije sakrifiet tud e beo, ha bep miz, eur buguel bihan, c'hoaz euz ar vronn. Neuze, beuzet enn he zaëlou, hag he zaoulagat savet et trezek ann En, e lavaras d'he vignon sантel :

« War ar Men-Ru zont, konsakret da eun Doue barbar, me a « reï sevel eun Iliz kaër d'ar Werc'hez, hag el leac'h ma skuiller « goad ann dud da Deutatès, e skuillo Mamm a gwir Doue he « grasou war Breiz-Izel. »

Gralon a zalc'haz ma d'he c'her, ha beleien ar baïannet o veza en em revoltet pa veljont dispen templ an Doue faoz Teutatès, ar Roue kristen ho zrehas e kever Argol e penn ar Vretonnet konvertiset.

Goude beza gret he beden, war Menez-Hôm, ar roue Gralon a heuillas Gwenole da abatti Landevennek, savet gant-han, eun neubeut blaveziou kentoc'h. Diarog kement-se, en devoa c'hoaz roët he balèz, e Quemper, da Sant Kaourintin, pehini enn devoa torret he naon d'ez-han ha d'he gompagninez gant eun tam d'euz he besk bian. E plas ar palès-se e ma brema Iliz kaër Kathedral Quemper.

Gralon à dremenaz e Landevennek a rest euz he vuez enn eur binijen galet, hag alies e kare mont gant he vignon ker da Remengol, da bedi evit he bobl, ann *Ittron-Varia-Remed-Oll*, Beza enn devoa ann heur d'he gwelet, brudet braz e pevar c'horn Breiz-Izel, hag o vervel etre divrec'h sant Gwenole, e Landevennek, e recommande he ene da Zoue enn eur lavaret gant fizianz :

« Itron-Varia Remengol,
« Mirit ouzin na zin da goll. »

— 3 —

Pemzek kant vloas a zo abaoe ma e maro Gralon, hag ar Vretonet, pere zo bepret tud a feiz hag a galon, o deuz c'hoaz sonj eus ho roue koz hag eus e vignon, Sant Gwenole. Mes ma c'hanavefent gwelloc'h histor ho bro gaér, pa zeuont da zul ann Drinded da bardon bras Remengol, ha pa velont mór Douarnenez, Ménez-Hôm, Landevennek a tour huel Illiz mirakuluz ann *Itron-Varia-Remed-Oll*, e lavarfent, ann daëlou enn ho daoulagat, enn eur vale gant respect war douar ar Zänt hag ar Rouaned :

« Braz ar buzudou a zo bet
« Ebars ann amzer dremenet !... »

Braz ive ar burzudou a ra c'hoaz krio, ann Itron-Varia-Remengol, enn andred ar Vretonnet. ha, dreist-oll, enn andred ar belerinet a deu bemde d'he gwelet, alies euz a bel bro, ha kals anez-ho diarc'hen hag e korf ho rouchedou.

Ar vinoret dilezet, ann intanvezet paour, ar beorien noaz, soudarded Breiz-Izel, e kreis tan ar brezel, ar vartoloded war ar mór braz e furol, ann holl dud affliget a gorf, a galon hag a speret, darn enn ho foaniou, d'arn enn danjerriou, darn all enn dizesper, ha darn, ive, war gwele ar maro, o deuz sonj euz ho Mamm douz a mad, hag alies e leveront dez-hi, gant karante ha gant fizianz enn he galloud hag enn he madelez :

« O Gwerc'hez sakr Remengol, Patronez Breiz-Izel,
« Pedit evidomp, hirio ha pa rankimp mervel ;
« Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonnet
« Ho deuz ho karet, ho kar hag ho karo bepret. »



GWERS AR ROUE GRALON HA KEAR IS

War don : *Judik hag Holofernes*; pe war don : *Bosen Elliant*.

I

Petra'zo neve e kear Is,
Ma ze ken foll ar iaouankis ?
M'ar klevan-me ar biniou,
Ar vombard hag ann delennou ?

N'euz e kear Is netra neve,
Ann ebattou ma 've bemde.
N'euz e kear Is nemet traou koz.
Ann ebattou ma 've bemnoz.

Bojenno drez zo divoannet
A dor ann ilizou prennet,
Ha war ar beorien e wëla
Ec'h hisser ar chas d'ho drailla.

D'ha c'hoesek vla ann oll verc'het
N'ho deuz Doue'met ar pec'het
Ha, da ober he gurunen,
E roont ho c'haëra rozen,

Ahès, merc'h ar Roue Gralon,
Tân ann ifern enn he c'halon
Er penn kenta deuz anñ diro1,
A gas d'he c'heul ar gear da goll.

Sant Gwenole, gant kalonad,
Zo bet m'eur vech e kaout he zad,
Ha gant daëlov, ann den Doue,
ENN deuz lavaret d'ar Roue :

— « Gralon, Gralon, laka eves
« D'ann dizuzou a rën Ahès :
« Rag tremenet vo ann amzer
« Pa skuillo Doue he goler,

« El lec'h m'a voa c'hoarsadek kent,
« E vo neuze skrignadek dent,
« El lec'h m'a oa kanaouennou,
« E vo neuze skrijadenaou !... »

Hag ar Roue spourounet,
He verc'h hen deveuz kelennet ;
Mes, diskaret dre ar gozni,
N'euz mui ann nerz da stourm outhi.

Ha, skuiz gant rebechou he zad,
Evit mont deuz he zaoulagad,
Hi'deuz gret, gant droug-sperejou,
Eur palès kaër, tost d'ar sklujou.

Eno, gant he amourouchen,
E ma fennoz ann obaden,
Eno, enn aour hag er perles.
Evel ann heol e pâr Ahès...

II

— « Plijadur dec'h er palès-man,
« Merc'het chentil ha potret skan,
« Plijadur dec'h ha nosvez grén, »
Eme eur Prinz enn eur antrenn.

Ar Prinz a zouge dillat ru,
He varo a voa hir a du,
Hag he izili a verve,
Hag he zaoulagad a zeve.

— « Ra viotdeut mad, estranjour,
« Eme Ahès gant eur beg flour ;
« Ia, ra viot deut da gwela,
« Mac'h ma hanvëit ann traou fella. »

— 5 —

— Neuze m'em bo digomer mad,
 « A respontas ann divroad :
 « Rag me er fall zo kent disket
 « Hag ann hini n'euz emkrouet!..»

A kerkent Ahès d'er pedi,
 Da ober eun dro zauz gant-hi,
 Hag ann oll, a eneb Doue,
 Gwasa ma c'hallent a doue,

Pa voa d'ann obadezen-ze fin,
 Danser Ahès, en eur c'hoaïzin,
 Hag enn eur zevel he ziou skoa,
 A lavaras : — « Nouzoc'h netra !... »

« Kerc'hit din-me deuz a gear Is,
 « Vesseillou santel ann ilis.
 « Kerc'hit kroas ar c'hrussufiet
 « Eun hosti zakr, hag e velfet !... »

Ahès, respontas timad :
 — « Kavet vint enn Iliz va zad,
 « Rag va zad diot-me a gred
 « Eun tromplen-ze a Nazareth !... »

Tria redas e ber amzer,
 Hag a ziskaras ann Aoter,
 Hag ann traou zakr a we douget
 Etre ho daouarn miliget.

Ar Prinz ru, raktal m'ho gwelas,
 A greüs he galon a c'hoarzas,
 Hag a lavaras c'hoaz enn-han :
 — « Plijadurd'ec'h er palès-man!.. »

Da genta a doliou boutou,
 E vrujunas ar vesceillou,
 Goude 'flastras ar grussufi,
 Hag e krenchas war ann hosti !... »

Ha war-n'he, gant oll e noaz,
 En eur gana : — « Mallozd'argroaz!.. »
 E raz es eiz stum dishenvel.
 Dansou ar seiz pec'het marvel !... »

Kerkent ar palès a grenas,
 Hag ar c'hurunou a strakas,
 Hag a dreuz ho zellou nec'hed,
 E skoas tân glaz al luc'hed.

— « Na c'houi 'vel, emear Prinz ru,
 « Me laka Doue war e du... »
 Ma lavarent oll gant glac'har :
 — « Ahès e deuz kavet e far !... »

III

Pa voa fin d'ar sacrilejou,
 Messager an droug sperejou,
 Chomet eh eunan er palès,
 A dosteaz da gaout Ahès.

— « Va doussik koant, merc'h da C'hra-
 « Ha muia karet va c'halon, [lon
 « Ha n'elfent me ket eneb gis
 « Guelet alc'houe sklujou ker Is. »

— « Va zad a zoug enn he guerc'hen,
 « Ann alc'houe aour deuz eur chaden,
 « Ha va zad breman zo kousket,
 « Ha kaout an alc'houe n'allan ket.

Mes hen d'he zreid ann eun strinkas,
 Ha d'he dornik flour a bokas,
 Hag e dallas dre he zellou,
 Karget a dàn hag a zaëlou.

IV

Heb goud ar pez a dremene.
 Neuze, eur pennad ac'hane,
 Ann he balès ar Roue koz,
 E voa kousket e kreiz an noz.

Kambr paour Gralon ne voa enn-hi
 Netra nement eur grussufi
 Deuet a zorn eur mignon ker,
 Sant Kaourintin, Escop Quemper.

— 6 —

Netra nemet eun Aviel,
Roët c'hoaz gant eun den zantel,
Roët dez-han gant Gwenole.
Evel eur merk a garante.

Kaër enn he gozni, vel enn Æl,
E kouske Roue Breiz-Izel,
Hag, en dro d'he dall, he vleo gwen,
A re, dispak, eur gurunen.

Neuze, Ahès, ar Brincez fall,
Evel pa vije skoet dall,
ENN he gambr, heb aon 'rag Doue,
A deu da laëras ann alc'houe.

ENN eur vale, war beg he zroad,
Ar verc'h a dosta skan d'he zad,
A goustadik deus he guerc'hen,
A denn, neur c'hoarzin, ar chaden.

V

Piou a deu du-hont gant ar ru,
Pignet war eun hinkane du,
Hag hen d'ann daoulamp war he gein.
Ken a strink ann tân deuz ar vein ?

Hennes eo messager Doue,
Digaset enn Is d'ar Roue.
Hennes eo Abostol ar feiz,
Saint Gwenole, karet e Breiz.

Tostât 'ra enn eur c'haloupad
ENN he zorn deo he vaz abad,
Hag eur stôl aour war he zaë venn,
Hag eur c'helc'htan enn dro d'hebenn

Setu hen e dôr ar palès
E p'ini e kousk tad Ahès,
Diwar he varc'h, ann den zantel
A c'halv, enn noz, a voëz huel :

— « Gralon, Gralon, sao heb dalc,
« Sao evit heuilla Gwenole,
« Sao evit tec'hel rog ar mîr :
« Sklujou kear is a zo digor ! »

Heg ar Roue koz trubuillet,
Er mes he vele zo zaillet : [ma!...]
— « Din-me, din-me, va marc'h pri-
« Siouas ! peurgollet ar gear-ma !... »

Ha war he varc'h, e ber amzer,
E kerz da heul he vignon ker,
Ha war ho lerc'h, enn eur hiudal,
E klevont ar mîr o ruillal.

Neuze ar Brincez dirollet,
He amourous gant-hi kollet,
Dre gear Is, ha glei hag a zeo,
A rede dispaket he bleo.

Pa glevas daou lamp ar c'hezek
A raog ar mîr e tiredek,
Dre al luc'het, gant nec'hamant,
Hanveaz he zad har ar zant.

— « Va zad ! va zad ! m'ar em c'harit,
« War ho marc'h skan va c'homerit. »
Hag, eb respont, ann tad tener
A zao he verc'h war ann tailler.

Kerkent ar mîr a vuanna,
Ha Gwenole, enn eur grenâ,
A gri : — « Gralon, tôl anndiaoul-ze
« Divar dailler dahinkane !... »

Kouskoude c'hoaz, leun a enkres,
Ann tad a zalc'h ar bec'heres ;
Mes ar zant a ra sin ar groas
Hag a stog out-hi penn he vaz.

Kerkent, mestres ann droug-speret
A ruill er mîr braz fuloret,
Hag e kleo tost ar Roue kos
Eur c'hoarzin skiltre kreïz ann noz.

— 7 —

Mes, rented skanvoc'h eb dale
E sail prim da c'heul Gwenole,
Hag he varc'h, gleb he beder c'har
A lamp deuz or mōr enn douar.

Brema, ed e Marie-Morgan,
Ahès, deuz skeud al loar a gân,
A gân, hag enn eur vousc'hoarzin.
A grib, er mōr, he bleo bezin.

VI

Da zao heol, ar Zant ha Gralon,
A bigne war leïn Menez-Hôra,
P'hini, he dreid ebarz enn trez,
Zao he benn war Douarnenez.

Ac'hane Roue Breiz-Izel,
War he lerc'h a dolaz eur zel ;
Mes, el lec'h Is, gant he deg dor,
Ne velas mui nemet ar mōr.

— « Eur gear em boadeuzar gaëra,
« Ha setu hi et da netra !... »
Ha he galon olla fraillas,
Hag he zaoulagat a welas.

— « Gralon, Gralon, 'me Gwenole,
« Gralon, d'ann daoulin ganem-me. »
Ha Gralon, didan e c'hlac'hар,
A goë d'ann daoulin d'an douar.

Hag eno, dispak he vleo gwenn,
Hag e dall pleget er boultrén
E lavare c'hoaz ar Roue :
— « Ra vo gret bolonte Doue !... »

Pa zavaz diwar he zaoulin,
Dindan tân flamm heol ar mintin
E velas, a dreuz he zaëlou.
E lugerni *Ru-Men-Goulou*.

War ar men-ze, hon tadou koz,
A skuile goad d'eun doue foz,
Hag ar Roue, e ber amzer,
A lavaraz d'he vignon ker :

— « Du-hont, e memor a gear Is,
« Me savo d'ar feiz eun Illis.
« Hag, évit tsteni d'ann oll
« M'he galvo ilz *Remengol* (1),

« Rag war dolmen ru Deutatès
« Me lakaï da ren ar Werc'hes,
« Ha bepbloaz, enn enord'ar Groaz,
« E rin ober eur pardon braz.

« Eno, ann oll dud affliget
« A gavo d'ho foaniou remed,
« Ha silvidigez d'ho ene,
« Drezc'hraz Mari gwir Wamm Doue

« Pa vo ann doueou maro,
« Ha koët m'eur a goat dero,
« Eun de, deuz ar pevar avel,
« E teuio d'hi pobl Breiz-Izel. »

Neuze, ma ve sonj a C'hralon,
E vo lavaret a galon :
— « Braz ar burzoudou a zo bet
« Ebarz enn amzer dremenet !... ,

(1) Remengol, hanvet gwechâl e *Ru-Men-Goulou*, da lavaret e *Men-Ru-ar-Goulou*, abalamour ma oa eno eur men ru, pe eun templ, konsakret da c'houlou De, enoret evel eun Doue, dindan ann hano a Deutatès (Doue-Tad), ar roue Gralon, goude, beza diskare tann templ-ze, ha savet, enn he blas, eun Iliz kaér, da Vamm ar gwir Doue, a chenches hano payen *Ru-Men-Goulou*, enn hano kristen a *Remengol*, da lavaret e *Remed-Oll*, deuz a behini ar Batronez a zo hanv et ann *Iltron-Varia Remed-Oll* (Notre Dame de tout Remède), abalamour d'ar burzoudou bras a ra bemdez, eno, ar Werc'hes, abaque amzer ar Roue Gralon betek hirio.

Eno zo c'hoaz induljansou a re vrassa roet gant hon Tad Santel ar Pab d'an oll gristenien a deu da Remengol da bedi, a galon, Patrones Breiz-Izel. Dre eur skrit

PEDEN AR ROUE GRALON

D'ann Itron Varia Remengol

Itron-Varia-Remengol
 Mirit ouzimp na zaïmp da goll ;
 Pedit ive, ho mab Jesus,
 M'ha vezimp gant-han evurus.

Itron-Varia-Remengol,
 C'hui eo Rouanez ar bed oll,
 Bezik hor Mamm, hor Batrones,
 Ha ni ho meulo da james.

Apostolik roet e Rom, en Iliz Sant Per, kement heleg a lavar ann ofern war aoter vras ann Itron Varia-Remengol, a denn a boaniou ar purgator eun ene, p'hini a ia raktal d'ar baradoz.

Ann dregon a vis mae 1858, an Itron-Varia-Remengol a zo bet kurunet gant eur gurunen aour ha perlez, roet d'ez-hi gant hon Tad Cantel ar Pab Pii Nao.

Remengol a zo bet, a viskoas, ar gaëra hag ar santel a Iliz a Vreiz-Izel ; enoro a rer enn-hi darn euz ar groaz hag a gurunen spern J.-C., darn euz a relegou ar Werc'hez, Santez Anna, Sant Joseph, ann ebrestel, ann Doctoret euz ann His, Sänt Breiz-Izrel ha relegou ouch' penn daou vil Sant all : hervez an dud koz peb gwir-Vreton a gle, eur veach da viana, *beo pe varo*, ober pelerinach Remengol.